

bremañ



kazetenn ar stourmoù e breizh MAE 1985 Niv. 44



LOUZAQUIN UN DROUG RET?



PLANT SUKR / RABEZ UR STOURM DIGEMPOUEZET



TREDE BED AN EOUL-MAEN A-ENEP AR BEIZANTED

La lettre de ...

SOLAGRAL

ul liamm etre ar poblou

Bremañ : Da gentañ, Alan ar Sann, displegit deomp petra eo "La Lettre de Solagral" ?

Alan : "La Lettre de Solagral" a zo anv ur gazetenn a vez embannet reoliek, bep miz abaoe 4 bloaz. Degouezhet omp gant an niverenn 36. Solagral a dalvez da Solidarite Agricole Alimentaire. Bep miz e vez un doser diwar-benn ur gudenn resis (maniok, soja,

al louzoù..., an had evit hini miz Ebrel). Met ivez keleier war broioù an Trede Bed, war ar boued, war al labour douar amañ hag ahont.

Bremañ : Dres, al labour douar, penaos emañ kont gant ho tarmpredoù gant tuda-bicher ?

Alan : Gwerzhet e vez ar gazetenn d'al labourerien douar hag ivez da dud all o deus ur

micher o tennañ deus al labour douar. N'omp ket gwelet mat gant tud e-giz FNSEA met gant ar FNSP pe al labourerien-peizanted 'zo tu d'en em glevout war boentoù 'zo. Er mod all, bep 2 viz e vez moulet 4 bajenn ouzhpenna, lakaet e-kreiz an niverenn. Graet eo an dra-se kentoc'h evit ar skolioù.


...PAJENN 6

E SANT BRIEG

8/9 A VIZ EVEN



GOUEL Pobl Vreizh



Ne oa bet gouel ebet war -lene. Unan a vo er bloaz-mañ, e Sant Brieg avat. Un tamm bihanoc'h eget e Brest e vo moarvat met a-bep seurt strolladoù a dalvoudegezh a vo memestra. Setu ar programm evit ar mare :

11 eur : FEST NOZ VRAS gant Jolli Monde, Amzer zo, Baron hag Anneix, hag ur bern tud all !

7 eur : Véronique IONATOS, kanerez a Vro-C'hresia, 9 eur : Claude NOUGARO hag e strollad Jazz.

9 a viz even

2 e 30 : Victor RACON (rock, bequene ha fant...)

3 e 30 : Jean KERGRIST, ar furlukin Cocogema.

4 e 30 : Tokoto ASHENTY (sonerezh a-vremañ eus Bro-Gameroun).

6 eur : Norman STANSALL, c'hoarier gitar eo bet e strollad SIMON HA GARFUNKEL.

Evel-just, evel ar bloavezhioù tremenet e vo boued, e'hoarioù evit ar vugale, diskouezadegoù artizanelzh... Poñubl e vo mont war an dachenn-gampiñ evit netra.

Mont e-barzh : 60 lur an tiked prenet en a-raok evit an daou zevezh (gwerzhet adalek an 2 a viz Mae un tamm pep lec'h e Breizh).

8 a viz even

3 eur : kregiñ a ra an traoù.

3 e 30 : Strollad KORNOG

5 eur : Gilles SERVAT

7 eur : Strollad rock (rock ar bloavezhioù 60) "FERLANDISES".

BREMAN NIVERENN 44
MIZ MAE 1985

TAOLENN

KORN AR PETRA DIN ME. 2.3
TEVEOU LEC'HEL..... 3

PENNAD KAOZ

GANT AR BED KELTIEK... 4
QUEMENER, QUERE..... 4
SKINGOMZ..... 4

SEVENADUR

UNVANIEZH SEVENADUREL... 5
DEOMP BUGALE..... 5
DIBAB..... 5
KEMBRE..... 5
DESKADUREZH..... 5
TAOLIOU PLUENN..... 6

ESTREN-VRO

LA LETTRE DE SOLAGRAL... 6
TERRE D'ESPOIR..... 7
ETIOPIA..... 7

FILMOU

BRO SINA WAR AR SKRAMM 8
LEVRIOU..... 8

DUDI

SEKREDOU CHANIG..... 9
PLADENNOU..... 9
TENZOR AN ENEZENN..... 9

KEMENNADENNOU HA KELEIER
MESK-DIVESK.....10
STAJOU.....10
KENDALC'H KELTIEK.....10
PLAS LABOUR.....10
OALED TREGLOU.....10

Ar vaketenn gant Lena Louarn - Silvi Donnart - J. Killever - Mikael Baudu

Ar pennadoù gant Bernez Boule'h - Ronan an Henaff
Yann Leaskildri - Tangi Louarn - Y. Ber Delisle - Joël Donnart - Olivier ar Mogn - Iwan Kadored - Mikael Madeg - Gwenael Emelyanoff - Yann Fanch Jacq - Bruno Per - Andrev ar Bras - Yann Pennhalleg - Garan ar Meur -

lua'hskeudennou gant OP.
Time - La vie -

RENER BREMAN Mikael BAUDU

Moulet e Ti Mouderezh Al Lisoù-13, strada ar Moneiz-35000 - Roazon-

KOUMANANT BLOAZ 96 lur.
Evit 6 miz : 50 Lur (6 niv.)
da gas da BREMAN - 8,
strada Hoche - 35000-ROAZON

Ne anavez ket BREMAN an holl
schonserien evit c'finañ
Kavit deomp chomlec'hioù mi-
gnoned a vefe dedennet gant
hor c'helaouenn, ha kaset e
vo dezho un niv. evit netra.

War Ouest-France, pajennoù a-bezh a-vruderezh gant Phenix, Lara, Terre de France, Maisons de l'Avenir, Florilege, Mondial Pratic, Petra a lavaront ? Reñt a reont o c'her evit sevel tiez hervez ar priz sinet er c'hevrad gant an tiegezh, en ur c'houlenñ 3 % hepken eus an arc'hant deiz ar sinadur, en ur reiñ un dale resis evit sevel an ti, hag en ur vezañ kiriek eus pep tra er saverezh-se.

An traoù-se n'int ket nevezioù : skrivet int bet e lezenn ar 16 a viz Gouere 1971 (rann 45-1). Ar saverien tiez a ra bruderezh evit lavarout e heulioñt al lezenn azalek bremañ. Petra a raent a-raok ? Petra a ra ar re all ?

Arc'hant a c'hounezont da nebeutañ: Bouyghes da skouer 1,2 miliard a lurioù afer e 1983 evit 4407 ti. Da lavarout eo war-dro 300 000 pep ti gant ur gounidigezh krenn war bep hini a 12 700 lur.



A. Gosselin degemeret gant ar Jeneral Jerome

Nann, n'am eus ket laeret ar podad dienn... Hen touñ a ran! Setu skridoù diwezhañ an ltron Gomulka, 62 bloaz, a zo en em lazhet e Champigneulle (Meurthe-et-Moselle) d'an 10 a viz Ebrel! Damheñvel an istor-se ouzh pezh a oa c'hoarvezet e Kastell-Paol e miz Genver 1983: eno en devoa tarzhet ur c'hwitelladenn skrijus pa oa ur vamm gozh 80 bloaz o kuitaat ar Prusic. N'en devo laeret netra, met he enor he doa kollet : en em grouget e oa e-pad an noz...

MESK-DIVESK

Ur scoop gant O.F. d'ar 25 a viz Ebrel 1985: 22 eurvezh eo bet lakaet 39 a soudarded eus Lande d'Udee da saludiñ o mistri d'ar 15 a viz Meurzh.

Ur scoop all gant Bremañ : ar Prefed nevez (c'hwit oar an Ao. Gosselin am eus kom -zet diwar e benn en niverenn diwezhañ) a zo aet da wela-denniñ an 3vet Rannvro Archariezh d'ar 17 a viz Ebrel. Digemeret eo bet gant ar Jeneral Jerome hag gant ar C'honral Duval. Ar re-mañ o deus lakaet o archerien da saludiñ ar Prefed nevez, reut ha difiñv e-pad pep munutenn.

Gwashoc'h 'zo, spier Bremañ a zo test : er c'ha-zarnioù e vez dihunet ar soudarded abred er beure evit mont da saludiñ un tamm banniel triliiv.

Peur e echuo doareoù ar sklaverezh en hor gevredigezh ?

Ur gwallzarvoud war an hent pep 10 eilenn, ul laeradenn pep 80 eilenn, un tangwall pep 20 munutenn. Setu danveziou-labour evit an asurañsoù. Ar re-mañ a zalc'h da astenn o skudell. Gant ar Mondial Assistance da skouer (Kompagnunezh Amerikan) e vez digollet an embregerezhioù war-lerc'h tarzhadennou pe ta -gadennou o gopridi o veajiñ. Gant an New Hampshire e vo restaolet 2 vilion kenkas e vefe skrapet un den e-kerz ur veaj-afar ; nemet e broioù Amerika ar C'hreisteiz, e-lec'h ma 'z eo c'hoarvezet 80 % eus an 119 skrapadenn politikel a oa bet e 1983.

Peseurt esperañs - buhez gant an dud ? 70 evit ar baotred, 79 evit ar merc'hed. Disheñvel hervez al labour memestra: 76 bloaz evit ar skolaerien hag ar gopridi uhel (cadre supérieur), 68 bloaz evit al labourerien-dorn. Ne vez ket tizhet e retred gant ul labourer diwar pevar. Ha n'eo ket an alkol ar butun hag an emlazh a gont hepken, gwallzarvoudoù-labour ivet. Gant an B.T.P. sevel-tiez ha savadurioù da skouer, e vez implijet 1,5 milion a gopridi hag e c'hoarvez 230 000 gwallzarvoud-labour pep bloaz : 400 den a gav o marv evel-se.

Sizhun an deskadurezh gant un tren er porzhioù-houarn. Ha lorc'h adarre gant Chevènement diwar e vro hag e skol: an hini gwellañ er bed eo hor skol-vamm, emezañ. Ha ret e vo d'an holl vugale bezañ skoliataet azalek tri bloaz ! Ouzhpenn-se e vo hiraet ha diaesaet programoù ar c'hentañ derez.

Tamm-ha-tamm e kemeromp plegoù Bro Japan. Eno koulskoude e vez ken plijus an deskadurezh ma vez 2000 kelenner taget gant skolidi pep bloaz. E miz C'hwevrer diwezhañ e oa bet lazhet ur c'he-

lenn (24 bloaz) gant ur skoliad e Aomori. Nevezig 'zo eo bet krouget he bugel gant ur vamm dre ma oa notennoù fall gantañ er skol !

Na pegen tener kalon an den : e Bro-C'hall e vez war-dro 50 000 bugel boureviet gant o zud bep bloaz, ha 400 anezho a vev war-lerc'h merkoù karantez o zad pe o mamm.

Gwelloc'h c'hoazh e Bro Alamagn, gant 400 000 bugel pe krennard gwallgaset !

Klaved am eus komz eus kreizennoù digor d'ar maouezed skolet gante e London. Ne vefe ket poent digeriñ seurt tiez evit ar vugale ?

Komzet am eus deoc'h dija eus an tiez toull-bac'h leun-chouk : 44 654 den evit 32 500 plas. Roet eo bet da c'houzout e oa bet 58 den o 'n em zistrujañ e 1984 (40 e 1972). Ha c'hoazh eo sifroù an dud mar war-lerc'h un emlazh ha n'eo ket niver an taolioù-esse.

Ne oa gward ebet e-touez an 58 den-se ; prizonidi e oant an holl anezho ha 39 anezho a oa diarn. Pa vo lañ Ministr e 1986, e vo dav da Le Penn sevel ur bern tiez-toull-bac'h nevez, pe neuze implijout savadurioù all evel an tachennoù-sport.

D'ar Yaou 11 a viz Ebrel e oa aet Enver Hodja da anaon. Marksour-Leninour brudet, mestri bro Albani e-pad 40 bloaz ; ha piv en deus dalc'h et soñj eo bet ivez Guru bretoned yaouank pa oa c'hoazh eus strolladoù kleizelour marksour-leninour er vro ?

Un dra fentus am eus kavet en degouezh-se : gant mistri Moskvo e oa bet kaset ur pellskrid ken-gañv. N'eo ket bet digemeret na digoret gant rennerien Ivana zoken : adkaset eo bet en-dro.

Garan ar Meur.

OALED DIWAN TREGLOU

- 01-06 a viz Gouere : staj sinema.
- 02-05 a viz Gouere : staj lennegezh dre gomz.
- 03-05 a viz Gouere : vakañsoù evit krennarded (12-14)
- 08-27 a viz Gouere : vakañsoù evit bugale (6-12 vloaz).
- 01-10 a viz Eost : Staj bageal
- 05-16 a viz Eost : staj brezhoneg (pep live).
- 12-16 a viz Eost : staj c'hoariva kenaozet gant ar Vro Bagann.
- 18-24 a viz Eost : Staj Kembraeg.
- 19-31 a viz Eost : Staj war ar maez.
- 29-31 a viz Eost : Staj dañs ha kan ha diskan.
- Prizioù : kartenn-ezel 50 lur
Pred : 30 l. - Nozvezh : 30 l.
Devezh staj (gant ar c'hente-
lioù) : tro 110 lur, ha di-
benn-sizhun (gant ar c'hente-
lioù) : tro 120 lur.

STAJ

STAJOU KEMBRAEG/IWERZHONEG

Stajoù kembraeg hag iwerzhoneg a vo dalc'h'et e Skol-Veur Roazon (dindan ar Stummadur Dibaouez), etre ar 24 hag an 30 a viz Even. Daou live a vo hervez an dud enskrivet. Pouezet e vo war ar yezh komzet hag implijet e vo al labourva yezh ouzhpenn. Skrivit d'ar "Formation Continue" 6, avenue Gaston Berger - 35043 - Roazon Cedex pellgomz : (99) 59.09.40 evit kaout muioc'h a ditouroù.

° KOUMANANT
BLOAZ
12 Niv
96 lur

KENDALC'H

E Breizh e vo dalc'h'et ar bloaz-mañ ar C'hendalc'h Etrevroadel. Goude an NAONED e 1974, LANNUON e 1981 e vo kərbenn Vreizh o tegemer anezhañ etre an 11 hag ar 17 a viz Eost 1985.

Pleustret e vo war-lerc'h ar yezhoù keltiek er vuhez a-vremañ. Studiet e vo kudennoù an embannadurioù evit ar vugale dreist-holl, lec'h ar yezhoù keltiek er mediaoù (fiñvskeuderezh, video, skingomz ha skinwel) hag er vuhez foran, hag ivez teknikoù modern ar c'helenn.

Ouzhpenn d'al labourioù -se e vo kalzig a draoù all : ur bourmenadenn, diskouezadegoù, filmoù, ha, bemnoz e vo abadennoù gant perzhidi eus an holl vroioù keltiek : sonerezh, koroll, kanaouennoù ha fest noz.

Evit kaout titouroù : skrivit da KENDALC'H KELTIEK ETREVROADEL - (C.R.I.B.) - 30, plasenn al Lisoù-35000-Roazon

KELTIEK

Pellgomz : (99) 30.06.87.

A-benn niverenn Bremañ miz Even, vo kinniget deoc'h programm resis ar C'hendalc'h.



PLAS LABOUR

DIWAN a zo o klask ur RENEREZH. E gefridi a vo ren ar skipailh a ra war-dro melestradurezh ha mererezh Diwan. Heuliañ ar stummañ hag an darempredoù er skolioù. E skiant-prenet e penn ur strollad a dud a vo degemeret gwelloc'h evit diplomoù hepken. (Live studi : Bac + 2 da nebeutañ). Kas ho Curriculum Vitae da : ZDIWAN 29214 -Treglonou-(Lanniliz)- Evit kaout titouroù pellgomz d'an niv. 16(98) 04.05.42.